

**BACCALAURÉAT GÉNÉRAL
SÉRIES L – ES – S**

**BACCALAURÉAT TECHNOLOGIQUE
SÉRIES STMG - ST2S - STI2D - STD2A - STL**

Session 2016

Mardi 21 juin 2016

<p>ÉPREUVE ÉCRITE DE LANGUE VIVANTE II BRETON</p>
--

Séries **ES/S** – Durée de l'épreuve : **2 heures** – coefficient : **2**

Série **L** Langue vivante obligatoire (LVO) – Durée de l'épreuve : **3 heures** – coefficient : **4**

Série **L** LVO et langue vivante approfondie (LVA) – Durée de l'épreuve : **3 heures** – coefficient : **8**

Séries **ST2S** et **STMG** – Durée de l'épreuve : **2 heures** – coefficient : **2**

Séries **STI2D**, **STD2A**, **STL** – Durée de l'épreuve : **2 heures** – épreuve facultative

SUJET

**Le candidat choisira le questionnaire correspondant à sa série.
Le candidat répondra sur une copie en précisant le numéro des questions.**

L'usage de la calculatrice et du dictionnaire n'est pas autorisé.

Ce sujet comporte 6 pages numérotées de 1/6 à 6/6.
Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.

BARÈME DE NOTATION	
1^{ère} sous-partie : compréhension de l'écrit	10 points
2^{ème} sous-partie : expression écrite	10 points

Diell 1



Les Lavandières de la nuit / Ar c'hannerezed-noz, Yan' Dargent

Diell 2



Le Père Maunoir obtient le don de la langue bretonne / Ar brezhoneg desket dre vurzhud gant an Tad Maner, Yan' Dargent.

Diell 3Yan' Dargent un arzour kevrinus.

Kalzig a zanvez brezhonegerien o deus klevet kaoz eus an daolenn *Le Père Maunoir obtient le don de la langue bretonne*, kludet e-barzh iliz-veur Kemper. Hag ul lodenn vras anezhe a bed ivez evit deskiñ brezhoneg ken buan hag an Tad Maner ! Pet anezhe a oar piv en doa livet an daolenn vrudet-se ? Yan' Dargent an hini eo.

5 Jean-Edouard Dargent (e anv gwir) a oa bet ganet d'ar 15 a viz Here 1824 e Sant-Servez-Landivizio, Bro-Leon. E dad a oa genidik eus Elzas, kemeret en doa da bried merc'h rener un ostaleri bloaz a-raok. Pa oa daou vloaz Yan' Dargent e varvas e vamm. E dad a yeas da Landerne da gavout labour hag a fizias e vab en e dud-kaer e Sant-Servez-Landivizio. Plijadur en doa Yan' Dargent gant ar vuhez-se en natur.

10 Ur bugaleaj gant e dud-kozh

Levezonet e oa bet kalz gant ar c'hontadennoù hag ar sorc'hennoù bet kontet gant e vamm-gozh. Istorioù ar Gelted Kozh, ar c'horriganed, ar Sent ... Da vezañ skoliet er c'hentañ derez e oa bet kaset da Blouared evit deskiñ gant un eontr kozh dezhañ. Eno en doa graet anaoudegezh gant un den a oa chomet unan eus e vignoned karetañ : Fañch an
15 Uhel. Da c'hwezek vloaz e adkavas e dad e Landerne. Un taol chañs en doa bet : kavet gantañ labour en ur gompagnunezh labourioù publik e Brest hag a oa o klask tud yaouank donezonet gant an tresañ.

Ur vuhez arzour dic'hortoz

20 E 1844 e oa e Troyes. E gompagnunezh he doa bet ur marc'had eno : tresañ ul linenn hent-houarn nevez. Ober a reas anaoudegezh gant ul livour a-vicher : Jean-Nicolas Schitz. Hag eñ ha broudañ anezhañ da vont war-zu an arz ha da zilezel e labour goude bezañ gwelet e gaiseradoù tresadennoù. Kemer a reas e amzer ha kregiñ da liveañ war-dro 1848.

Burzhud *Les Lavandières de la nuit*

25 Kavout a rae e awen e-barzh mojennoù Breizh hag e gorn-bro orin. E Saloñs Pariz 1861 en doa diskouezet peder zaolenn : *Souvenirs de collège*, *Les Pilleurs d'épaves*, *Pâtre des plaines de Kerlouan* ha *Les Lavandières de la nuit*. Gant an daolenn-mañ en doa graet berzh forzh pegement : ar c'hannerezed-noz a c'houlenn digant an dud kollet gwaskañ al
30 liñselioù evit o disec'hañ, kement ha kaout tro da lazhañ ar paourkaezh tud goude. Anv a veze anezhi er c'hazetennoù, ha begenn Pariz ha mont d'he gwelet hag aet he brud betek Bro-Saoz. Prenet e oa bet an daolenn gant Lord Hamilton e 1862 e-doug Diskouezadeg hollvedel Londrez. Kollet eo bet dibaoe. Yan' Dargent en doa livet unan all e 1888, bravoc'h c'hoazh hervez an arbennigourien, hag a zo bremañ e Mirdi an Arzoù-Kaer e Kemper. E daolennoù all war-lerc'h n'o doe ket ar memes planedenn. Ret e oa dezhañ
35 tresañ evit gounit e damm bara. Dindan daou-ugent vloaz en doa skeudennaouet ur bern levrioù. E anv a vez kavet e-barzh ouzhpenn 200 levr.

Livour ar sakr

40 Adalek 1870 e krogas gant al livañ arz sakr. Labouret en doa e lec'hioù relijiel e-leizh met dreist-holl e-barzh tri anezhe : iliz Sant-Servez-Landivizio, iliz-veur Kemper hag iliz Sant Houardon e Landerne. E labour brasañ eo hini an iliz-veur. Eskob Kemper en doa goulennet digantañ e 1871 kinklañ chapelioù an iliz-veur. E-pad eizh vloaz en doa graet war-dro ar chanter. C'hwezek taolenn-voger en doa livet. Gourc'hemennet e oa bet zoken gant prezidant ar Republik Mac-Mahon e 1874. Aze en doa livet *Le Père Maunoir obtient le don de la langue bretonne.*

45 Dibegadur ar penn

E fin ar c'hantved en doa bet kudennoù arc'hant ha gwerzhet e vaner gantañ a-raok mont da Bariz evit bevañ e ti e vab. Hag eñ ha mervel d'an 19 a viz Du 1899 e divrec'h e vab nemetañ, Ernest. Daou vennad en doa disklêriet a-raok mervel. Da gentañ, bezañ douaret e bered Sant-Servez-Landivizio. Ha da eil, doujañ d'ur c'hiz kozh e Bro-Leon : dibegadur 50 ar penn¹. Pemp bloaz goude bezañ beziet ar c'horf marv, e oa bet diveziet ha dibennet evit lakaat e glopenn e-barzh ur voest koad er garnel². Un nebeud kazetennerien eus Pariz a oa war al lec'h siwazh hag en deizioù goude en doa Yan' Dargent ur brud nevez goude e varv. Hag evit tud ar vro, brud tud ouez ...

Maksim Touzé

Bremañ, niv. 404.

¹ Skrivet en deus Charlez ar Govig diwar-benn dibegadur ar penn e *L'Âme bretonne*

² Karnel = ul lec'h e-kichen ur vered el lec'h ma veze lakaet an eskern (« ossuaire » e galleg)

A) Kompren (10 poent)**Tous les candidats traiteront les questions suivantes.**

- 1) Gant piv e oa bet livet an dielloù 1 ha 2 ? (1 respont mat a zo)
 - An Tad Maner
 - Yan' D'argent
 - Kannerezed-noz
- 2) Eus peseurt kelaouenn eo bet tennet an diell 3 ?
- 3) Pelec'h emañ staliet an daolenn a gont mojenn an Tad Maner ? (1 respont mat a zo)
 - E Sant-Servez-Landivizio, Bro-Leon
 - E iliz Sant-Houardon e Landerne
 - En iliz-veur Kemper
 - E Mirdi an Arzoù-Kaer, Kemper
- 4) Petra en doa desket Yan' Dargent digant e vamm-gozh ?
- 5) Petra oa post-labour kentañ Yan' Dargent ?
- 6) Petra ha piv en doa lakaet Yan' Dargent da cheñch micher ?
- 7) Pet taolenn *Les Lavandières de la nuit* en deus livet ? Petra int deut da vezañ ?
- 8) Peseurt frazenn a zispleg mojenn ar c'hannerezed-noz ? Adskrivit anezhi.
- 9) Peseurt frazennoù a glot gant ar pezh a c'hoarvez war daolenn an diell gentañ : (2 respont mat a zo)
 - Ankeniet eo ar paotr
 - Kludet eo e-barzh iliz-veur Kemper
 - Tasmantoù eo ar c'hannerezed-noz
 - Kemeret en doa da bried merc'h rener un ostaleri
- 10) E fin e vuhez en doa graet ul labour hir. Peseurt hini ?

Seuls les candidats composant au titre de la LVA de la série L (Langue Vivante Approfondie) traiteront en plus les questions suivantes.

- 11) Penaos eo liammet an daolenn *Kannerezed-noz* gant bugaleaj Yan' Dargent ?
- 12) Petra en doa goulennet a-raok mervel ?
- 13) Peseurt brud en doa tapet goude e varv ? Perak ?

B- Pennad-skrid (10 poent)

Choazit e-mesk ar sujedoù-mañ :

- **daou sujed (rann L), 150 ger dre sujed**
- **daou sujed (rann L LVA), 200 ger dre sujed**
- **ur sujed (rannoù all), 200 ger.**

1) Tro ho peus bet da glevet un istor skrijus. Kontit.

2) Un den yaouank en deus dibabet mont war ur vicher na blij ket d'e dud. Savit an diviz etrezo.

3) Plijout a ra deoc'h mont da welet mirdioù pe ne ra ket ? Displegit perak.

4) « E fin ar c'hantved en doa bet kudennoù arc'hant ha gwerzhet e vaner gantañ » : ha bevañ brav a c'heller gant nebeut a arc'hant ?